

▶ Plouyann gwechhall

Bremañ n'eo douar Plouyann nemet ul lodenn eus kumun Vontroulez. Koulskoude, betek derou an ugentvet kantved, Plouyann a oa ur gumun anezhi hec'h unan. Met dija ul lodenn vad eus ar gumun a oa sellet outi evel pa vije eus Montroulez, evel lakaomp karterioù Koadserc'ho ha Troudoustenn. Al lec'hioù-se, memes tra, a oa anioù brezhonek outo, (miret e galleg!). Aes eo da gompren: gant un enklask graet e 1928 diwar-benn implij ar brezhoneg er parrezioù, Plouyann a oa “brezhoneg dreist-holl hag un tammig galleg” evit ar prezegennoù hag evit ar c'hatekiz.

Plouyann a oa d'ar poent-se ur gumun diwar maez. Ur bourk bihan gant un iliz (XV-XVI), un ti-kêr ha komersanted evel an holl vourkchoù. Anioù brezhonek a oa ouzh ar c'hêriadennoù e-lec'h ma veve labourerien-douar. Manerioù a oa ivez e peb korn eus ar barrez.

E-kichen an hent-tizh emañ atao maner an Nec'hoat. Perc'hennet e oa bet gant ar Jeneral Flô, ganet e Lesneven ha marvet en e vaner (1804-1887).

Kavet e vez, bremañ, lise al labour-douar e-kichen maner Susinioù (XVI-XVII). Prenet e oa bet e-pad an Dispac'h gant Charles Cornic (1731-1809), moraer brudet, bevet ha marvet er maner-se.


Tro-dro da zismantroù maner ar Veuzit ez eus bet savet bremañ ur c'harter nevez: tiez, bras ha bihan, un dachenn labour ha kenwerzh, ha servijoù.

E-kichen chapel Santez Jenovefa (Azginivelezh) ken brao, emañ maner Kerozar, ur plas dudius.

E maner Koad Kongar, bremañ kreizenn varc'hekaat, eo ganet ar barzh brudet, Tristan Corbière (1845-1875) savet gantañ Les Amours Jaunes.

Maner Penn ar Ru a zo bremañ e-touesk tier Koadserc'ho. Bet e oa bet maner Nikolas Coatanlem, moraer brudet. Er maner-se e oa bet savet ar “Manu” kentañ evit ar butun. Joseph Dupleix (1697-1763) en neus bevet eno, e dad o vezañ rener ar “Manu”. Evel-se eo kresket Troudosten, ur gêriadenn a veve enni labourerien ar Manu.

▶ Ploujean autrefois



Maintenant la terre de Ploujean n'est qu'une partie de la commune de Morlaix. Cependant jusqu'au début du vingtième siècle Ploujean a été commune à elle seule. Mais déjà une partie de son territoire était considéré comme commune de Morlaix, par exemple le quartier de Troudosten et de Coatserho. Ces lieux cependant avaient des noms bretons (gardés même en français!). Ceci est facile à comprendre: selon une enquête faite en 1928 sur l'usage du breton dans les paroisses, Ploujean était “surtout breton et un peu français” en ce qui concerne les prônes et le cathéchisme.

Ploujean était à cette époque une commune rurale, un petit bourg avec église (XV-XVI), une mairie et des commerçants comme tous les petits bourgs, avec des villages où vivaient des agriculteurs. Il y avait aussi des manoirs à travers toute la paroisse.

A côté de la voie expresse se trouve le manoir du Nec'hoat. Ce manoir avait été la propriété du Général Le Flô, né à Lesneven, ambassadeur en Russie et mort dans ce manoir (1804-1887).

On trouve maintenant le Lycée agricole auprès du Manoir de Suscinio (XVI-XVII). Cette demeure a été achetée durant la Révolution par Charles Cornic (1731-1809) marin réputé; il y vécut et y mourut.